

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**P'edon war bont an Naoned**

P'edon war bont an Naoned, *a velocypette* [vélocipède]  
War ar bont o pourmen, *sur un vélo, sur un vélo*  
War ar bont o pourmen, *sur un vélo percé*

Me 'welas ur plac'h yaouank  
War ar bont o ouelañ.

Ha me c'houlen diganti  
Perak e ouelit 'ta.

Va gwalenn aour, emezi  
Er mor a zo kouezhet.

Pegement 'rofec'h din-me [rofec'h]  
Me 'yelo d'he c'herc'hat

Hanter kant skoed emezi  
'Roin deoc'h a galon vat.

Ha d'ar c'hentañ ploñjadenn  
Netra n'en deus gwelet.

Evit an eil ploñjadenn  
Ar walenn n'eus touchet.

Ha d'an trede ploñjadenn  
Martolod 'zo beuzet.

E dad, e vamm er prenestr  
Sellet outañ beuziñ

Tri mab em oa emezi  
O zri ez int beuzet.